


# KIMIADOU

## Eur zoudart yaouanc

O Kuitad e guerent hac e Vigonet

COMPOSET ER BLAVEZ 1906

VAR AN TON A ZEZIRFET



Me zo eur soudar yaouanc o vonet d'an arme  
A meus hoant ziscleria daro demeus va bue  
Mes an amzer a vanq din ma speret zo troublet  
Mar vancan da recita me vezo excuset.

Evit petra discleria e vuez pen da ben  
Discleria rin seulement e amzer a anquen  
Hini an tad ac vam pere a jom e guer  
Den a zo evit compren peguement in tener.

Creno va ra isili mantret eo va halon  
Na meus quet mui eur moment a gonsolation  
Mar miset bet ar galont eur speret cales guel  
Gant an discadurez en devoa Duhanel

Dre ma oa eun den contant oa ive eur pot fur  
Mar vize chomet er guer pebeus deur plujadur  
Mes an amzer a zo deut couls a vit a real  
Billet en deus recevet ret a vo partial.

Pe autraman ouspen eur speret da zisci  
Evelt m'en devoa bet ar prins Zingaleri  
Coulou a ran eun talant velt en devoa Mozar  
Ebars en amser guechal pa va var an douar

Tosteit va mignonet da glevet ar himiad  
Peguer cri an disparti deus eur vam ac eun tad  
Goude kement al a boan zeo bet deus er maga  
Breman eo ret e guer et pa zeo deut ar guella.

Sclerigen digant Doue goudeze ar pouvoir  
Evit galout pen dre ben discleria an histoir  
Pehini zo compost bars er blaves presant  
E nor bro ni bretonet gant eur zoudart yaouanc.

Briato a ra e vam neur laret kenavo  
Comprendit eta breman peguement a zaëlo  
A zeu eus a daou lagat o vriata e buguel  
O lavaret kenavo couls a oa dezi mervel.

Pehini zo glaharet tont da guitat e vro  
Deut gantan ya mignonet da vesca o taëio  
Houi etrezoc'h tud yaouanc silaouit mad eta  
Gant an darn vrás a hanoc'h hoarvezo memes tra

Pa oan me eus da vaga emezi va buguel  
Alies meus sonjet en disparti cruel  
Gant peguement a boan a meus me da zavet  
A da zilezet breman col a rin va speret.

Pe zelin demeus da blas lec'h a vizes e noz  
En quichenic an tan a roc mont da repos  
Da vele a da zillat ac ive quement tra  
Ar pez zo bet ne servich rayo din gouela.

Mes pa zeo ret da guitad me lar dit kenavo  
Aroc ma vi distroet matreze vin maro  
Quitad va hrouadur goude ma zeo maguet !!  
E neur laret kement man e halon Zo mantret.

Guelet eur vam mantret ac eun tad a ouëlan  
Glahar vras ezeo certen panem gonsideran  
Briato a ra e dad o laret henavo  
Calet es va mignonet clevet o himiadou.

Petra a rin me breman pa vije partiet.  
Na meus mui evit partaj mes nec'h a poan speret  
Allas va hrouadur houman zo eur glahar  
Abaoue e mon er bed na meus quet bet e far

En lec'h ar joa ar blujadur oa pelzo enon ti  
Breman vont chanchet gueneomp en tourmant ac  
E plas ar hanouenou e vizes o canna      [ennui  
Ramplacet vont gueneomp siouas eneur ouëla.

Pa zeo ret dit partial kers hardi va mab ker  
En servich an nation gra ervad da zever  
A gant eur honje mad mar tristoes en dro  
Gant ar joa deus da velet a vo fin don daëlo

Neuze o pedan va zud ker tachet nem gonsolet  
Va speret a zeui dar guer bep heur a bep monut  
Rac pa vezin partiet ac et er mez ar vro  
Pa zeuin da zonjal euoc'h me a scuillo doëlo.

Defot beza bars er guer velt dan amzer dremenet  
Evit ober ma fossili da veza o consolet  
Mes savomp on oll glemou da bete tron Doue  
Pa zeo guir a zirij tout herves e volonté.

Gout a ouzoc'h couls a me eo laket da ped den  
E chans var an douar iveau e blaneden  
Eun hent a zo domp tracet hant Doue puissant  
Dre henes a dremenimp a pa vemp drouc contant

Ar pez a lavaran deoc'h breman neur guemiadi  
Eo dont de nem gonsoli no hamzer a gosni  
A me ya a galon vad vels o peus din laret  
Gant eur guir esperans pr zout hoas do quelet.

Cetu me partiet eus a dy va zud quez  
Evidomp tout va breudeur pebeus tristidiguez  
Matreze nem velfomp mui biquen var an douar  
Pa zonjan en quement ze a meus poan a glahar.

O va Doue puissant consolet va speret  
Da bete ty va mestrez a meus hoas da vanet  
Desir a meus d'annous dei ar helou dinatur  
Or halonou a rano gant an displujadur.

Salud de hu va mestrez rouanez va spéret  
Deut ez o breman an heur da veza separat  
Et tresomp ni a zo bet gond ouzoc'h va mestres  
Marvaïllou consolant ac a joa aliez.

Breman pa zeo deut an heur vit enim separi  
Deut dre o comsou charmant un tam dam honsoli  
Rac o comzou plah yaouanc o deveuz ar pouvoir  
Da rejouisso eur galon de zeno aglahar.

O consoli va mignon na rin mui davantaj  
Va speret a zo niget a colet houraj  
A nen deus quet hoas pe zo me moa deho prometed  
Eur garantez barset pueit a vin var ar bed.

Dre ze o pedon iveau delhit ar bromessa  
N'ani poa gret dan eil zul a vis eost diveza  
Mar bezit fidèle din emezi va mignon  
Ar garantez evidoc'h a zon don em halon.

Va harantez va mestres na finisso biken  
Ken a vezimp separat gant Doue éternel  
Breman houlan diganec'h ken evit partia  
Eur zin deus o carantez pe merk ar bromessa.

Ba zeo en honestiz n'ani a houlenet  
Birviken den yaouanc na viot refusé  
Delit va servicher kemerit va goalen  
Nac hor haransez ou daou e lakit da eren.

En amzer e vec'h er servich me a vo o mestrez  
Pa vo echu o conge hemp e prialedez  
Partial a renket a velan den yaouanc  
A me a joms er guer da vevi gant tourmant

Na ouefen burviken explica va glahar  
Echu eo ma flujadur breman var douar  
Kenavo den yaouanc pa zeo ret o quitad  
Meur a dapad en daëlou zeui eus va daou lagad.

Breman epad o konge emei va servicher  
Da hep eun nomb amzer houi scrivo din lizer  
Partiet a galon vad emezi den yaouanc  
Gras deh de nem gontanti bepred no regimant

Gout a ouson va mestres e deveuz calonad  
Va hunan a meus iveau pa zeo ret ehuitad  
Deus a noz ac ar mintin aliez var an de  
Teui nor memoir da zonjal a neil ene guile

Arsa va mestrezic desir a meus brema  
Da ret dec'h eur souvenir quen evit partia  
Cetu aman eur mouchouar gant va daëlou trempet  
Ac a zeziran rei dec'h m'o ped en kemeret.

Rac diou galon unanet dre garantez barfet  
A ra cales poan ganto pa vent dispartiet  
Pa oan me e creis ar hoad akedet o ouëla  
Me a glevy eun eonic uz va sen o cana.

Evit na neufet da zonjal pas vin em regimant  
Er boan zo eus o quïad va mestrezic yaouanc  
Partial a renken lavaret kenavo  
A bezit fidel dinme dalhit mad do comzo.

Mel o sevel va daou lagat da zelet eus an eonie  
Estonet enz e glavet o cana magnific  
Neur adres dezan comzou casi evelt deun den  
Gant eur galon mantret a carguet a anquen.

Neuze deus ty ma mestres me ya a galon vad  
Betec ma oan nem gavet bars e kichen eur hoad  
Enem gavet eno me arretas em za  
Da zonjal bars em mestres ma gomançis gouella.

Arsa ta eonic binn me no hont dans arme  
O pedi ran da anono breman dam harante  
Eur helou consolant a meurbed favorab  
Vit ma zizeho an dour demense daou lagat.

Coajou bras ac eureus me meus da dremenet  
Alies o hont da velt va guir vuyat caret  
E han breman da zisheoli didan darn ens da vranc  
A da gonto va doare da lod eus da zeillou. [cou

Pa vin erru en arme me a rimo eur zon  
A matreze kement ze a rei joa de halon  
Me zigaso eur hopi dar guer dam mestres coant  
Eun al a salhin gueuen bepred er regimant.

Ne doun mui evit comto breman d'am guir vestrez  
Va halon e zo mantret gant an dristidiguez  
Prostern a ran dan daoulin didan brancou ar gue  
Evit goulen azistans digant ar guir Doue.

Gout hano ar hamposer matreze a zeziret  
Corentin or Bouard dre oll ezeo hanvet  
Pen devoa e homposet e oa en Algéri  
Neur guer a zo en Afrik ac e hano Bougi.

Va speret a zo savet tre da betec e dron  
Da houl évidomp on daou e venediction.  
Ouspen a meus goulet dre ma ze puissant  
Bars en plas diou galon drist da lacat diou gontant

Breman en illis ven a ra zemeuranc  
Ebars eun Bannalec neur hornic deus ar Franc  
Eno ema breman sambles gant bried  
Grac dezo de nem garet keit a vont var ar bed

# CHANSON

## Potret Plouillau

Var ton : Adieu Pontreø

M'am bije speret da gompenn, evel a meus fantazi,  
Me a vije n'em impliet da zonet da gomposi  
Eur c'himiad leun a c'hlac'h, gret dar gonscrivet yaouanq  
O deus tennet ar billet ebars er blaves prezant

Ebars er bla mil niz cant c'hoec'h, ar bemp a vis guengolo,  
E zeo digueet adare eus a barres Plouillau  
Tud yaouanq evit an arme, tud deus an terrupla;  
Glac'haret eo oll ligne, p'o guelont o partia,

Da bartia gant an actif ne zeus quet nemet pevar;  
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan ar Maledar.  
Ha Yannic Prat, eus ar Goajou, ha Pipi an Aveant:  
Pevar den eus ar re vrava, corfou kær ha tud vatllant,

Ervoanic Jacob a lare en daiz-se d'he gamarad :  
Em'a zo eun devez trist hac a ra din calonad !  
Guelet va mam baour o vouela, ha va zad kès desolet !  
Va c'halonic ebars em c'kreis zo dija casi rannet

Kals a sonchfè dè, marteze, pennos e vent eur poultron  
Em be aoun rac eun ten fusuil pe rac eur voulet canon  
Pe otramant aoun rac ar fatig o vale dre an hentchou  
Pe gousquet var eu guele gant ebars er c'hordgardou'

Douguen va dillet var va chouq, va fusuil ha va zabren,  
Bale bemde a guer da guer dre ar fanq hak ar vouillen  
Ha goude e fin va beac'h, rencont marteze campi,  
Pe gousket var an douar ien, pe otramant bivoaki.

Tor o deus an nep a sonch-se ; ma c'haljet lenn em c'halon,  
Evit gwelet va bolonte ha va inclination,  
Ma ne fotje nemet va goad, me en scuiffe tout joaüs  
Evit souten eun Impalaër eun tad ker carantezus !

Pioù na gombatfe ket gant eun Impalaër christen ;  
Eur gaus ker just ag e hini, zo facil d'a souten,  
Pa zomp memprou da Jezus-Christ, soudardet an Aviel,  
Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Speret-Santel.

Arça eta, camaradet, ken quittaad euz om c'homtre,  
Demp ni da ilis Plouillau ar supplia hon Doue  
D'hor preservi demeus goal chans pa vésimp en armeeou  
Ha da gonsoli, bars ar guer, hon tadou hag hon mamon.

Adieu dec'h, Autro Sant-Millau, patron euz ar barouz ma,  
Adieu kerent ha mignonnet, cessit breman d'a vouela.  
Pedit Doue hag ar Verc'hez, da gavet soign ac hanomp,  
Hac hon Æl mad d'on c'hondua partout elec'h ma zefomp.

Adieu, va mab, va esperans, eme an tad desolet ;  
Piou a gonsolo va zud paour, goude ma vi partiet ?  
Pa vin accablet gant cozni, me vo clevet o laret :  
Ma vije ma mab kez er guer, en dije va soulajet.

Clevit ar vam o quiniadi ive digant he buguel ;  
Deuz amia c'hoas, ma bokin eur vech kent evit mervel.  
Aben ma retourni d'ar guer, me vo ed euz ar bed-ma,  
Deus aman etre va dioubrec'h evit ar voeuch diveza.

A guichen at moment fatal ma c'heus tennet ar billet,  
Beb noz vel ma fot din kousket, me a seblant da velet  
O tont deus enr gombat sanglant var eur chariot bleset  
Pe tolet en eun hospital, gant an oll abandonnet.

Ar zoudard yaouanc kontristet c'hoas ken evit partia,  
Evit essai o c'honsoli a lavar en eur vouela :  
Tavid va zad ha va mam baour, ha bevit en ezperans,  
Doue, tad a visericord, a zo hrs e brovidans,

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoir,  
Gras Doue gar ar Verc'hez, e vez fin do elahar  
Evit merk eus hon vaillantis, gant lore deuz hon tocou  
Ni a zistroyo prest d'ar guer evit sec'hï o taëlou.

Adien da baros Plouillau, ha de holl habitantet,  
Adieu d'hon oll anaoudegez, ha kerent a mignonet.  
Ha ma na memp ket ar bonheur er bet-man da em velét  
Gras deomp ebars er barados assambles da em gavet.